

AN DISPUT CHOQUANT

SAVET ENTRE DIOU

PLAC'H YAOUANC.

Tosteet da chileo kannan,
Pa meuz cavet sujet da riman,
Ma clevfet an disput choquant,
Savet entre diou plac'h yaouanc
Evel eur rageset tréménet,
Ha sambles bars neun néhadec.

Tregont plac'h ha voangq ho nezan,
Hac ho clevet an disput-man,
Ha tout ha léront hinq contant,
Ha vo groët eur zon divertissant,
Ha bolemour d'ar homzo vaën
Ha neuz laret an eill d'he ben.

Bars ma bro ha voelan eur his,
Commun hen toez eur yaouancuis,
Nep ha ve he plac'h an nehadec,
Ha dac'h da gast dezi eur boquet,
Ha d'abardez hep lacaï mar,
Hei eur pot da douguen eur c'har.

Pa voe sonnet creiste-anter,
He antreas eur plac'h gant eur baner,
Lech ma voa eur merc'het ho nezan,
Vid rein eur boquet da Annan,
Hac ive eur voutaillet vin,
Ha daou pe tri grapat rezin.

Eur plac'h-man gomz dre discourio,
Pe voa ho rein he fresancho.
Nez Izabel, pe deuz goëlet
Ea biou ha roet enr boquet,
He sav eur jalousi hen he fen,
Me deuz bet laret evellen.

Min gret-din eo vit ober jill
Ha roer an treo-ze d'err pec vill,
Pe he deuz groet dies han neze aman,
Evit hon lacaat d'a viscan,
Hac ober he ambarasso,
Evel pa de camarado.

Annan pa deus bet intentet,
En he boutail he ze croquet,
D'evfan d'a yehet Izabel,
Pa voa neumpgat mad an avel.
Evidon, he mezi, n'a nonquet couant,
Bepret he plijeän excellent.

IZABEL.

Tout pezh homp aman pa nomp c'houant
A momp eur sorti-se gant hon arc'hant,
Quereouls ha c'hui faç piccotet,
Daoulagat-du, groac'h didantet.
N'onquet piou ha quemervfe frejo
Da rein d'eur sort dac'h boquedo.

ANNAN.

Evidon na nonquet stiped,
Ha ran ma zremen dre eur bed,
Couls ha ma ra pompinello,
Crampez pardon liboudenno,
C'houec'h miz goude ma vent dimet,
Ha ne mez an oll ouz ho goëlet.

IZABEL.

Te viquet vill goude dimin,
Rac na gavi den deuz eurejin,

P. 1 de la feuille n° 20 (voir page 13 du catalogue).

Cette « feuille volante », mesurant 230 mm. sur 85, fut imprimée par la
Veuve Le Goffic. L'auteur en est Pierre Raison (voir page 340).